

CHANSON NEVEZ

Var sujet glac'har ha trididiguez daou den yaouank
demeuz a barroz Speyet
prest da vervel gant ran galon



Tud yaouank deuz ma faros, didosdet, me o ped
Da zilaou ar vuez a zo guenin eruet :
Me zo eur sergent-major, tistrei deuz an armeio
Rejouisset ma c'halon, o entreal bars ar vro.

Pa voant me partiet, da gommanç va c'honge,
Moa losquet var ma lerc'h objet va c'harante
Moa losquet var ma lerc'h fleuren ar yaouankiz,
Evit mont da ober eur c'hampagn, trezek ar guer a Baris.

Epad pevar blas anter e zon bet e regiment,
Hi neus gret va oll chagrin a va brassa tourmant ;
Bep noz a bep mintin, a pad an deiz aliez,
Va speret a nije betek ty va mestres.

Ma speret a nije betek va bro benniget,
O sonjal a beb moment bars va amzer passeet,
C'hoarvezout a re guenin e guis an durzunel,
Pa ve kollet ganthi e far a nom dol da vervel.

Guenime, tud yaouank, a c'houarvezet memes tra
Glac'haret bras a voan o tond da partia.
Rannet e voa va c'halon o toned d'he c'huitad,
Hi pa velas ac'hanon e devoa calonat.

Eiz devez araok partial visemp assembles bemde,
Ag eur sulvez d'abardae hi a lavares di-me,
An daelo n'hi daoulagad, hi mouez entrecoupet :
— Petra rin-me, den yaouank, pa vec'hu partiet.

— Me ya da vont breman da ober pinijen,
Da laqua lioua e du va oll dillajou guen,
Evit ober caon da va muia karet,
Partiet evit ar Republik en deiou tremenet.

Pa vec'h erru n'ho regiment, me o ped da servicher
Da rei d'in ho quehellou raktal dre eul lizer,
Me a meus chagrin bras gant aon a vec'h kasset ;
En tu all d'ar mor bras guis d'ar vartolodet

Ar blavez mil eiz kant tri uguen a daouzek,
Da zevez gouel an Nedelek, a voan-me partiet.
Da zevez gouel an Nedelek, da zeg heur deuz an noz.
Pa voa va c'hamaradet o c'honet da repos.

Voan o font ti va mestres, da laret dei kenavo.
Hi pa velas ac'hanon o gommença gwelo.
— Arça eta, den yaouank, moc'h o vont er mez ar vro.
Beuzet e ze ma c'halon en eur mor a zaelo.

Kenavo a laran d'heoc'h, kenavo va mestres.
Ben ar pevar pe pemp bloas n'hi n'hon gavo asambles
Hi a vouches d'in neuze, n'hi daoulagad an daëlo.
Hag a koueas d'an douar kasi guis d'eun den maro.

D'an de kenta blas, voant erru bars ar guer a ruel,
Setu me scrivas eul lizer d'am mestrezik fidel,
Hi a respontas d'in pevar devez goude,
Penaos a voa klan, klan braz var e gouele.

— Mar na teud ked d'am c'honsoli ma servicher fidel,
Gant a chagrin, ar Glac'har me zo prest da vervel,
Ho pebeus malheur evit eun den tener da guitat e vro,
Ho velet e vuia karet, bars toul dor ar maro.

Pa vijen en faction var ar meneou huel,
Ma daoulagad a droe varzu Breiz-Izel,
Ma daoulagad a droe varzu ty va mestres,
Mes na vellant netra nemet koajou aliez.

Deus ar mintin a gleven un nombr a lapousset
A mouez ar rossignol, var bek ar veen pignet,
Ar rossignol a laras din dre e vouez melodius :
— Te ho c'heus ebars ar guer eur vestres karantesus.

— Eur vestres leun a c'hlac'har, a karget a anke.
Aboue e zoc'h partiet, oc'h ober pinijen.
Ar rossignol a laras d'in dre eur vouez triomphant :
Me gred e zoc'h glac'haret, kouls a c'hi, soudard yaouank.

— Var da zal he zeo merket, gant liou an dristidiguez,
Penaos he zout anquenet, o quitad da vestres.
Neuze a zisquennas d'an traon da vodik, da vodik,
Hag e teuas var ma scao, da gana ar muzik-

An eostik a laras d'in gand e vouez triomphant :
— Me a vezo fidel d'hoc'h keit ma vec'h no regiment
Arça eta, eonik bihan, mar vec'h d'in ken fidel,
Ez a iello evidon, da vetek Breiz Izel.

Ben varc'hoas mintin kerkent vel m'a vo scler,
Te a deuio dam c'hamp, da guerc'hat eul lizer.
Hanter noz mintin, na voa ket scler an de
Me glevas ma messenger ; var ma frenes et kana.

Lavaret a re din neuze dre e ganaouen ;
— Roet din ar paper, ma partiin souden,
— Kers eta, eostic bian, da ziuo eskel digoret
A Kemeret an hent da vonet da Speyet.

Neur errui bars ar vro te hei da dy ma mestres,
Ag a kommanso kana e kichen e frenes,
Te a lavaro dei penaos vec'h digasset,
Deus a guer a Baris, gant e muia karet.

D'an eur an anter noz erruas an eostik,
Da houl an digor digant ma mestrezik :
— Plac'h yaouank emezan, digoret din an nor
Me zo digasset aman, gant va sergent-major.

An den yaouank se, herves a meus klevet
A zo choazet gant Doue, vit bea da pried ;
Setu ama eul lizer a neuz roet din-me,
Me ia da partiel breman, da gonta dezan o toare.

Ar bloaves mil eis kant tri-uguent a c'huezek
Ministr ar brezel e devoa decidet
Ministr ar brezel e devoa decidet
A vije bet liberet tout ar blavez funek.

Da ma mestres raktal, a scrivas eul lizer
Evit annonç dezi a voan erru d'ar guer.
— Arça eta plac'h yaouank, a lavaras d'ezi,
Kemeret da joaüstet a kuitet da ennui.

D'an dekvet a viz dû a voan partiet,
Deus ar guer a Baris, vit va bro benniguet ;
Neuze e teuas sonj d'in na demeus ma mestres.
Evit eun den yaouank, pebeus plijadurez.

Neur errui bars ar vro ezon en dy guellet ;
Neur entreal bars an ty desy voan nom adresset :
— Bonjour d'oc'h ma mestres, setu me bars er vro.
Erru ont gant joaüsted, da lakat fin da canio

— Laket breman e ru an dillajou pa gret
Laket lioua en du, pa oan me partiet,
Laket breman o torn c'hani ô servicher,
Ma vesimp ni unisset ar rest deus on amzer.

— Setu aman eur seïen, evit fin deus or yaouankis,
A meus digaset d'orc'h deus a guer a Paris,
Conservit anezi, gant o koalen arc'hant,
Ken a ieffemp on daou ous tol ar sakramant.

— François kes, va servicher, eme ar plac'h neuse
Na momp ket ar bonheur derrui bars ar point se.
O c'herent o deus chenchent abaoe zoc'h partiet,
Ny eo an daou malheürussa zo gant Doue crouet.

— Ma mestres ! ma mestres ! nam zisconsolet ket,
Kar me a meus eur galon a zo tener meurbet !
Me zo eun den yaouank, tistrei deus an armeio,
A meus souffret dija nomb bras a dourmancho.

— Mes ebars va oll chagrin me a nom gonsole,
Pa ten sonj din ac'hanoc'h va dous, va c'harante,
A bremen, va mestres, me vesemp separet,
Gant ou baret avel, me a vo diskaret.

— A possubl a ve eta, a nefemp meritet,
Deus aberz hor c'herent, eun dra kaer kri meurbet,
Deus guenin-me d'an illis, bezemp on daou fidel :
Iamp d'ober hor fromesse, dirag an Aviel.

— Neuze ni bedo Doue, hag e Vam beniguet.
Da rei da dout or c'herent sklerijen, var or sujet
Demeus ar bromesse a nump-ni on daou gret
Da vevi assembles, keint a vimp var ar bed.

— Arça eta, den yaouank, me guemer eur loden,
Demeus o c'hol chagrin, a demeus o c'hanken ;
Breman vellan ervad, demeus o propojo,
Evit on separi, neus nemet ar maro.

— Et breman d'ar guer, a me ia ive,
Hag informomp hor zud, deus bolonté Doue,
A ben dissul d'abardaë, d'an heur goude kreiste,
N'y nomp gavo assembles da gonta on doare.

N'y nom gavo assembles lec'h a mump goulennet
Sklerijen digant Doue, hag e Vana beniget.
Laromp breman eur *Bater* arog non zispartial ;
Kenavo ta, va mestres, kenavo dissul genta.

An dud yaouank errui barz ty e dad

— Arça eta va zad kez, selaouit va feden.
Me ia d'esplika d'och breman va flaneden,
Me ia da lavaret d'oc'h ar pez so erruet,
Hag ar pez a bouez bemde var ma speret.

— C'houec'h vlas so tremenet abaoe par ar C'hran
Voa goneet va c'halon gant eur plac'hig yaouank
Gant e c'hamaradezet moa guellet anezi,
Charmet doa va c'halon, goneze e voa ganthi.

An eil guech ma y guellis voa bars illis Sant Per.
Daoulinet ebars ar c'hœur vis-à-vis d'an auter.
Eno pa moa hi guelet neuze a moa sonjet
Penaos a voa un elez deus an env diskenet.

Pa voa echu an ofern, voan deut emez an iliz
D'hi gortoz barz ar verred, goude fin an offis,
Pa voa ho sortial ar mez deus ar porchet
Me zirijæs ma fajou vit monet d'y c'havet.

— Bonjour d'oc'h plac'hik yaouank, rouanez an douar,
Ebarz ar Finister, na velfem ket ho par,
Goneet eo ma c'halon guenoc'h plac'hik yaouank,
Lavaret din, me o ped, bremo ho sentiment.

— C'hui ez eo, den yaouank, an hini a garan,
Neus nemedoc'h d'am lakat evrus barz er bed-man,
Ma c'halonik a voa guenoc'hu gonezet,
Abaoue ar c'henta guech, ma guenoc'h parlantet.

— Mar vezimp separet, me vo ar malheurussa
A zo bet gant Doue krouet barz er bed-ma.
Rag se, eta hor zud kes, desianomp on devez
Vit ma eruffomp tout da parlant assembles,
C'hoant bras a mump on daou da vea priejo,
Evit gallout nom garout, tre betek ar maro.

Respont d'an den yaouank

— Arça'ta daou den yaouank, n'a deuz ho maguet,
Hag evit dimezi hor chonje na po ket,
N'y na gredomp birviken z'oc'h galvet gant Doue,
Kar n'a neeuz evidoc'h voalc'h a fidelite.

An daou den yaouank d'ho c'herent

— Ben dissul genta, epad an oferen,
Eguis domp ni hon daou, goulennit sklerijen,
Evar ar garantez a zo n'or c'halon,
Hag a pezo respont deus hon affection.
— Na deut ket da contrariat diou garantez barfait,
Pere varvo gani glac'har ma vint dispartiet,
N'y a deu do pedi da rei domp ho conge,
Ma vezo gret er bed-ma, pez zo laket gant Doue.

Respont d'an daou den yaouank

— Inutil ezeo d'oc'h insisti davantach,
Unan ahanoc'h hei d'ar gouent a hini al d'ar skolach
Noc'h ket galvet gant Doue da vea unisset,
Rag-se eta, daou den yaouank, rag-se nem separet.

An den yaouank de guerenn

— Arça eta, oll guerent, me ia da lavaret :
Ranna ret ma c'halon, troubli ret ma speret,
Me ia da lavaret d'oc'h kenavo ! kenavo !
Varc'hoas pa darzo an de, me vezo maro !!!

An den yaouank rencontras e vestres

Don heur goude kreiste, me gavas va mestres,
A y glac'haret bras a leun a distridiguez,
— Autrou Doue, den yaouank peubeus planéden,
Rannet ezeo ma c'halon, siouas gant an anken.
Oh ! kerent malheurus, c'hui a pe ar galon.

An daou den yaouank d'ho c'herent

— Preparet o tillat caon, aben arc'hoas vintin
N'y a vo kavet maro, dindau eur veen ivin
A zo kichen an ilis, e cornik er verred,
A dindan pehini, n'y a vo interret
Laket ac'hanomp, me o ped, dindan ar memes be,
Evit ma vefomp assembles, hed an eternite : Amen !

KANAOUEN AN DURZUNEL

Kalz anzer a meuz kollet
O furchal er c'hoajou,
• Vit tapout eun durzunel
Kousket var ar brankou
Devet emez ma amors,
Ha tennet a meuz fall,
Achapet an durzunel
Ha nijet er c'hoat all. (bis)

Diouz an noz hag ar mitin,
Me glev al lapousset,
O kana, o fredonin,
Da vek ar gwez pignet,
Na meuz niken anezo
Hag a bik ma c'halon,
Evel mouez eun durzunel
O welan d'he mignon.

Hirvoud a ran noz ha de
Gant ar boan ha glac'har,
Evel eun intanvez paour
Kollet ganti e far,
Ma neuz nikun anezo
Hag a bik ma c'halon,
Evel mouez eun durzunel
O welan d'he mignon.

Petra durzunal yaouank,
A dourmant da c'halon ?
« Kollet a meus, emezi,
Ma fidellan mignon.
Ma na zeu eur chasseour
Da ober d'in mervel !
Me varvo gant ar glac'har
Da va Mignon fidel.

Gwelet a meuz o vervel
An durzunal yaouank
Dizec'het oa ma c'halon
Gant ar boan an tourmant
Enn deus c'hoaz repetet
« Ha ma mignon fidel
Mont a ran da vervel »
Raktal eo tremenet.

